

CHANSON

AR

SEIZ SQUIEN NATUREL

Voar eun ton agréabl

Appolon, Mercurius, Venus ha Jupiter,
C'hui a delc'h var an douar an amitié sincer,
Hac a ra d'an dud yaouanq en em garet parfet,
Prestet d'hi ho assistanç, me o ped, eur momet.

Sperejo celestiel, astro ar firmamant,
Me a deu d'ho implori gant eur galon ardent,
Da rei d'in ar talanchou bere meus ezom
D'expliquan propojo arretet em c'halon.

Abostolet evruz, hanvet an Ebestel,
C'hui a ro instructionou d'ar gristenien fidel,
Pa noc'h choaset gant Doue, vit prezeg ar lesen,
Chilaouet he graouadur, exaucet va feden.

Rouanez an amitié, princes ar yaouanquis,
Moïses a Jeremi, cheffo deus ho illis,
Ha c'hui, Karante dener, sourcen an deliço.
Deus a gomzo eloquent rempliset ma gueno,

Ne c'houlennan quet antren bars en teologi
Na mont da gemer affer ous an dud a studi ;
Ar belec, an arc'hescop hac an dud a bluen
Ne garfen quet no enor divanquan an asen.

Breman c'houlennan avis an autoriteo,
Vit n'ho devo quet a lerc'h do reproch ma homzo,
Hac evit kaout repos da furchal va sperer,
E c'han d'antren en illis lerc'h hon bet badeet.

Patronez ar barous-man, ma c'harante divin,
Prosterned on dirazoc'h var benno ma daoulin,
Juntet gani va zaou dorn, digor ma daoulagad
O sellet trezeg an ev da c'houlen ar mennad.

Guir vad an Tad Eternel, ma Salver admirabl
Me zo deuet d'ho adori beteg ho tabernacl,
Disquennet mar plich ganeic'h eur zel a drugare
Var an hini disteran demeus o pugale.

Me zo eun den yaouanq zavand ha dizourci,
Boue an oad daouzec via on poursu ma studit,
Am eus c'hoant da declari ma bue malhurus,
Ma manquan dre ignorans, a c'houlennan excus.

Me o suppli Genitor, mest ar scrivannerien
Groguet breman bars em dorn, coduet ma fluen,
Ha c'hui tad a sclerijen poset war ma speret
Vit ma scrivin pen-da-ben, ma bue tremenet.

Mar mije bet eun talan vel devoa sant Paul,
Hac eur voes quen agréabl evel eur rossignol,
Da riman eur son nevez me laqui ma speret
En enor d'am mestres koant, ma guir vuan karet,

Mes me c'houlen faveur quen evit gommanç kanti
Rouanez an oll elez hac ini ar Messi,
A seiz squient naturel hag a seiz planeden,
Da rei din o assistans da boursu ma reglen.

Me meus choaset vit mestres fleuren ar yaouankis
Brillantoc'h evit ar roz hac ar fourdelis
Agreaploc'h da parlant evit an æle memes :
Kredan ket ma he far bars ar rouantelez.

Quentan m'oa bet an henor da velet ma mestres,
A oa e pardon Sant-Min gant he c'hamaradez :
O vale hag o pourmen evit ho fassetans.
Eno e devoa piquet ma c'halon gant cul lanç.

D'a c'houl se oan yaouanq, o kommans studian,
O poursu ma avantur mesq ar re zavantan ;
Ma c'horf vije er scol, mes allas ! ma speret
Gant ar boquet fleurisset a vije occupet.

Demeus an oll scolerien me oa, en assurans,
Ar c'henta, goude ze ne voant quet vit avans
Ha me o sonjal eun de monet beteg e zi.
Gant eur galon languissant da velet anezi,

Me o salut merc'h yaouanq objet ma c'harante,
Me zo deut d'ho kavet an devez a hirie,
Vit laquat eun tam amzer, mar be d'ho fantasi,
Da goutañ dec'h ma doare ha klevet ho hini.

Den yaouank, leun a furnez, me o salud ive,
Vel m'an devoa great goejeal ar sænt hac an æle,
Pere ive voar o daoulin dirag ar Messias,
Var lein mene Calvar pa oa e touguen e groas,

Ober ret d'in eun enor a zo agreabl
Gant ho komzo familier hag o polonte vad ;
C'hui eo an hini garan muan en assurans,
Nemet da Zoue hepquen na rofen a breferans.

Sellet Roue an envou en eur gadeur voen,
Var lein mene Sinai ho scrivan e lezen,
Dre behini e tifen ous he oll vugale
Donet d'en em draissan an eil hag eguile.

Me lar dec'h en guirione aman, ma servijer,
Oc'h eus goneet ma c'halon dre gomzo saluter.
Ha pa gaffen mab eur prinç, evel na gavin quet,
Ne desiran nemedoc'h vit bean ma fried.

Ho propojo ravissant a blij d'in, ma mestres
A rejouis ma c'halon ma noc'h traitoures,
C'houlennan netra diganec'h evit ho quitaat,
Evit ar veach quantan, met bean ma fried.

Arsa'ta ma servicher, couls eo dim finissan,
Me a deu da laret dac'h quen a vo ar c'hentân :
Ous ho pidi d'a retorn heb dale d'om guele,
Ma graç mad vo ganac'h partout lec'h ma c'hefet.

Vit an eil guech a gredan, me o vont da vele,
Gant eur speret quen contant hac ini an æle,
Da velet ma mestres koant, rouanez va c'halon,
Hi en deus ma remplisset a gonsolation.

Bonjour a joa ma mestres, rouanes ar fleurjou
A guemen zo biscoas plantet ebars er vro,
Brillantoc'h evit an eol, scleroc'h vit al loar,
Puissantan merc'h yaouanq a zo var an douar.

Me a garje bean bet eloquens Cicéron,
Pe autramant ar furrez e devoa Salomon ;
Eur gueno groet en arc'hant hag eun teod alaouret,
Pa bariant en ho pressens evel ma veritet.

Pa oc'h deut beteg aman dre garante parfet.
Me a rent dac'h ar salut gant enor a respect,
Mije gouvret ar feçon hag an tu da parlant,
A vije ma brassa joa plijont d'ho santimant.

Mes me zo eur plac'h yaouanq neus speret dister,
N'en on quet bed studiet velloc'h ma servijer
C'houi a voar scrivan ha len, ha me na ouzon quet
N'allan ket komz evelloc'h, rac se ma excuset.

Ma mestres, c'houi zo furoc'h evit Salomon,
Ma vije permetet d'in digor d'ec'h ma c'halon
C'houi nije guelet enni gravi an amitie,
Pini am euz evidoc'h gant guir humilite.

Ma queret a vemp on daou unisset assembles,
Evel ma oa Sant-Joseph hag on Mam ar Wer'hes,
Mar gallan o possedi eun de voar on douar,
Me a vezo ket joaüs vel an æle er gloar.

Me a zo eur feumeleun dister a galite
N'hon ket ingal n'ho quever en mado, en ligne :
Mes mar c'hom predestinet gant Doue eternel,
A vep hon daou unisset, ne c'houlennan quet voel.

C'hui eo fleuren a merc'hed a guemen zo er c'hanton
Chilaouet, ma plij ganac'h, me o galon.
Moes an hini disteran deuz o servijerien
A c'houlen eur mouchouer pe eun dabatieren,

Evit merq an amitie ma servijer fidel
Ezan da glasq alc'hoec'h a dierin armel :
Hag a vije ma c'halon o pije goulennet
Ma vije possubl en rei moa quet o refuset.

Tostait aman, me o ped, breman, ma servijer fidel
Cetu aman var an dol pevarzec mouchouer,
Ar peder dabatierent olifan, ze oa red
A c'hoas a so evidoc'h hag ouspen ma queret.

Me ielo breman da guer gant eur galon contant
Pa meus gwelet ma mestres, ha karante ardant
Ha ma partaget ganin lod deus ho garante ardant
Me a respecto anoc'h en durant ma bue.

Quen vo'ta, kloarec yaouanq ha ma brassa mignon.
Hoc'h aviso eloquant, ravis ma c'halon
Deuz a gemen den yaouanq euz ma darempredet
N'em euz karet nemedoc'h boe moc'h deut d'am gwelet

Ma mestres zo eur plac'h yaouanq hag e deus bleo melen
Ha daoulagad quen ardant evel diou stereden
Hannes en deuz ar pouar gant e zello mignon
Da rei d'he unan karet ar recreation.

Salut dec'h ma mestres koant gant henor a respect
Me zo deut beteg ho ty gant eur galon parfet,
Evel ma c'he gwech'al ar profet Daniel,
Betec dor ar barados da parlant ous an æl.

Dre gommandamant Doue evit goulenn ar c'hraç,
Da vean en e repos ebarz eun hermitach,
Mes allas, me zo eun den a zo bas a speret,
Non quet capabl d'a parlant evel ar profedet.

Me o ped ma servijer cesseret ho complimentant,
Ho tiscourjou admirabl hag o komzo charmant
Rac pa sonjan em speret ar pes e meus clevet,
Pa nevert oc'h ajistanç n'em moa disesperet.

Me a lar dec'h ma mestres, leun a honfusion,
C'houi ma laquet porcheres var doul dor ma c'halon
Hac ouspen se an alc'houe var ma oll secrejou,
Ne garant hini nemedoc'h ar guement so ar vro.

Noufoc'h biquen, ma mignon, me a lar dec'h aman
Caront anon a dra zur muioc'h vit n'hon caran,
Couscoude gant ma c'herent me a so difennet ;
Dre ma eo bet ar goel deod o preseq noc'h enep.

Quelo trist hag effroyabl, gravus a direzon
Te a blant eur c'hleve noas bars en creis ma c'halon
Eur vatimant am oa gret hag a so dispennet ;
Birviquen var an douar ne repos ma speret !

O majeste infini, ma Doue, ma c'hrouer
Diganaç'h a c'houlennan ar c'hras particulier !
An ners hag ar puissans rejac'h d an intanvez
Da distrujan gant e dorn roue Holophernes.

C'hoase c'houlennan, ouspen, gwis eun den a verit,
Oll dalancho ar profet hag ar roue David,
Vel m'en defoa gret goejal quen disquen d'ar blenen,
An empereur Bonapart hac e officerien.

Ma mije bet ar pouvoir hac ive ar puissanc
Evel defoa Sant-Louis pa oa roue ar Franç
D'exilant ar goal deodo deuz ar rouantelez.
E mije groet anter deus ma zilvidiguez.

Lennet ar scritur santel, me o ped ma mestrez,
Hac e cafet rapportet, var levr ar furnez;
A nep a gred goal deodo ze diavis a foll,
Ne mam quet voar an douar an ini plij d'an oll,

Malurus es ini zo var an douar,
Ma deu deannep feçon d'a gouen n'o fouar,
Ha zionas! quasi an oll abred pe divezat,
En peb amzer eo stignet ar pecho miserabl

Ar pab en e gathedral, ar roue var e dron,
An avocat ne studi, ar belec o sarmon.
Hag ar barner asseet quichen he dribunal.
So sujet d'a goal deodou quercouls vel a re all.

Breman gredan parfet a pez a meus lennet.
En eun levr ansien gret gant ar profeted.
Eo quen difficile beva divlan var an douar.
Vel mont d'ar fons ar mor bras ha return var ar bar.

Pa dei messenger Doue da draoient Josaphat
Da separi a re fall deus a vesq a re vad,
Vo goeled ar goal deodo dirag an assembles,
O von d'an ifern vit ann eternite;

Evit derhel a serman e ma greod d'am mestres,
Divesan moam bet an enor da parlant assembles,
Ez on deud d'ho saladi gant guir fidelite,
Mes ne c'houlennan netra henep ho polante.

Arretet ho propjo, breman, ma c'hamarad,
Lampat a ra ma c'halon, birvuin a ra ma goad,
Hag evit approuvin dec'h m'amitie noc'ch andret,
Ma queret ez int ganec'h e lec'h ma tisirfet.

Gret reflexion, var ze, me o ped, ma mestres,
M'am be o casset guin en eun guir esclaves,
Ha donnet doc'h eureuji hep conje o ligne;
Ze a ve reprochabl din en durant ma bue,

Mes confortet ho calon, marteze gant amzer
A dremeno ho fulor ha terri ha c'holer;
Hag a veomp unisset gant o c'honsatamant,
Hec'halon oa ken mantret qu'en n'ale qu'en parlant

Maleur vit en den yaouanq pa ne lezer anean
Da dimezi pen d'eus c'hoant d'an hini plij dean !
Distrempet ao an douar gant ho daëro
Quen a boulade an douar da gargan ho potu.

Me a deu d'ho suppliant, tud yaouank ma c'hontre
D'unissan ho c'halono assembles gant hon re;
N'en efoa leun a glac'har o quitaat ma mestrez,
Queit ma vin var an douar n'he ankoin james,

Mes Doue a lavar dimp ebars ar scritur sacr :
Trohan a refed ho torn a tenna o lagad
Guelloc'h eo mont gant eun dorn d'ar joaio evurus
Evit n'en dea mont gant daou d'ar flammo malurus

He zad a lavare d'in, setu aman lizer
Pehini meus bet recevet digant eun messenger,
Hag e meus commissien da rei anneau dec'h
Laquet an en ho codel ha casset-an guanec'h.

Sclerijen an oll astro he so hanvet ol loar
Disquen ebars em c'ho'on ha disec'h ma glac'har,
Ma permet ma daoulagat arretin ma daero
Da rapportin eun guentel enep ar goal deodo.

Ten foa gret avis, teod brutal ar furnest
D'hon tad a d'hon mam quenta er barrados terrest
Da bidi dimeus a freus difennet gant Doue;
Me so quirec d'hon mizer ha d'ho oll paourte.

Bars en prison Pharaon te en defoa plantet
Joseph, ar santelan den deus ar patriarchet,
Pa oa bet faus accuset gant pried Putiphar;
Boe ma oa krouet ar bed ec'h oud var an douar.

Te attac an dud yaouank, memeus var o c'henor,
Gant eur voes quen eclatant a ia beteg ar mor,
A deu da lemel dia te eun tensor excellent,
Preciussoc'h vit aour hac evit arc'hant.

Abalamour d'he ligne ec'h esperne Judas,
Hag avanq bars an histoar beteg Herodias
Pini conseillas e merc'h dre eun avis traitour
Da c'houlouen var eun assied pen Ian Vadezour.

Lar din, teod miliguet ma ne n'out quet contant
Bean a guerzet ma Doue ha dibennet eur sant
Pa c'houde en pad an amzer o clasq dont da laquet
Ar mein be var en douar da ruan gant ar goad.

Ne bad pelloc'h ma c'halon da breseg varnean
Pardon ha misericord e c'houlennan evitan
M'en deo eur glac'hard demeus he bec'hejo
Ha ma n'em gonvertisso betec fin he zeio

P'antreiz em c'habimet gant desolation
E zell da gavet eun dra a gonsolation
A c'his da len al lizer am boa bet dian e zad,
Ha digoris anean, m'en de a oa kalonnat.

Ma c'halon a zo glac'haret, ma Doue, pa sonjan
Bet oa e velet ma mestres vit ar voec'h divezan;
Roet eo ma c'honje, scrivet var paper guen
Ma c'houitans en general de dilezit a gren.

Me oa tri de ha taër nos hep dibi nag evan
Na quen neubeut hep repos; na ren nemet guelan
Dre ma requem n'en separi hep bean mevitet
Deus fidela merc'h yaouank anevan var bed.

An drived de a scrivas quelo d'he camarad
Ha me res dezi respont divar lizer he zad;
Prononcet eo an arret enep d'ho servijer,
C'hui iel breman d'ar gouant ha me chomo er ger

Pa gan bars ma studi o lenn ma levrio
Ma welen quasi man quen beuet gant an daëro
E renquis a dilezel ha mont da bazeal :
Ha me quemer ma fusuil vit mon da chasseal

Arri bars creis ar c'hoat, me a voa fatig bras
Ha me da guemer repos eno var ar ied glas.
Had evel eur Vadelen commañ da deplori
Ne oa nemed Doue hep quen capabl d'am c'honsoli

En creis ma brassan glac'har o sonjal em mestrez
Puasi vel dre eur miracl a veles eun heies
En em strinquas d'an daoulin evit ma zaludi
Inspiret a beurs Doue da don d'am c'honsoli.

Me ho ped, galand youank, arretet ha taëro
Ha laquet ho confianç en Krouer an envo
Doue a neus pouvoir da gonsoli an holl
A nep a fio ennen na nei james da goll.

C'hui a zo oar an douar dars en displujadur,
Noc'h eus defot a netra m'ar queret bean fur
Ha me a zo e veva bars e foresto
Hac e guemer plijadur da usan ma deïo.

Eno kolis memoar deus ma mestrez fidel
Ha credi n'oamp quiet choaset gant Doue eternal
Vit bean voar an douar assembles unisset
Graç dimp da vean eun de en pales an drindet.

Neuze retornis d'ar guier vel pas mije nijet
Toman re ma goad ouzin, ne santen quiet querzet
Ma speret a voa ascanv, ma c'halon quen joaüs
Evel ma c'heo bars an env an æle evurus.

Mar boe goejall ma c'halon carget a disesper,
Breman me zo quen ezet evel eun alc'houëder
Pini ia beteg an env ho retorn d'an douar,
Adieu laran d'an tourmant, achu eo ma glac'har.

Madelez oll puissant Roue an oll æle,
Me rend dac'h presentammant graçou a drugare,
P'o c'heus roet d'in ar c'braç, Roue ar firmamant,
Da finissa ma chanson joaüs ha triumphant.

Homan so eur zon neve rimet ha composet
Gant eur skrivagner yaouank demeus a Lanrodec.
Zo ganet bars ar bloa mil eis cant hac ugent,
Da diarog gouel ar Werc'hes a ve ebars an Avant.

Hac' vid esplican he noad d'an oll tud ignorant,
Tri mis a pevar ugent en tud all da daou c'hant
Ebars en kanton Plougat eo guanet ha maguet,
Hag e hano skrivet mad so GILLES MORDELLET.

Ma'r meus drouc laret netra gant ma fragilite,
C'houlennan iscus ous an dud ha pardon ous Doue,
Hag ouspen a tiseran da guement he c'hlevo
Ar bonheur da jouissans deus a c'holar en envo.

